

KANTIK ZANT ANTON A BADOU

War don : *Zantez Mari Mamm Doue.*

War skuer : *Kantik zantez Germana.*

Er bed kristen na ve komz, aboe eunn nebeut 'so,
'Met ouz eur zant gallouduz, zant Anton he hano.

DISKAN

*O zant Anton a Badou,
Eur c'hraz 'm euz da c'houlen ;
Zant oberour miraklou,
Silaouet ma feden !*

Ar zant *neve* war he vreac'h 'zoug ar Mabik Jezuz ;
Out-han ar Bugel divin a c'hoarz karantezuz.
Ar zant a lar da Jezuz oll ezommou ann den,
Ha Jezuz, d'he vignon mad, na revus nep goulen.
Kementgraz c'houlfet dre-z-han, d'he c'haout c'houi 'zo zur,
Herve lavar eunn doktor hanvet « Bonavantur ».

—o—

Zant Anton a oe ganet e bro ar Portugal ;
Hag ar goad oa 'n he wazied oa deuz ar goad royal.
He dad a oa deuz lignez Godefroi de Bouillon :
Dre he vamm e tiskenne d'euz Gouarnour Lisbon.
Pa rene he c'houezek vloaz, daoust d'ar bed ha d'he c'hloar,
E fellaz d'han 'n em zistag d'euz madou ann douar.
Mond a reaz da vanac'h daved Fransez Assis
Evid kreski enn vertu 'n eur heuill he reglen striz.
He hano brudet er bed « Ferdinand de Bouillon »
A'oe chenchet er govent enn hano « Frer Anton ».
Gouned a reaz koulskoude eunn titr noblanz *neve*,
Rag « A Badou » ve hanvet, enn koun d'he garante.

*Nep a zispign he vue 'vid ober var d'ar bobl,
A ziskouez ar gwella goad, hennez eo ar gwir nobl !*

Frer Anton 'pad unnek vloaz a labouraz noz-de
Da rei d'ar bec'herien baour donezon ar gwir fe.

Esoc'h eo kont' ar stered pa z'eo sklera ann noz
'Vid ann eneou gant-han kaset d'ar Baradoz.

- o -

Anton, pa oa er bed ma, a re traou burzuduz ;
Hag he c'halloud enn envou a zo ken estlammuz.

Eul lever en doa, var-n-han, skrivet he zarmoniou,
Hen koll a reaz, ha gant-han oll vreuz he studiou.

Eur skolaer, evid diski ar skridou prisiuz,
En devoa krabet an he, hag eet enn dro dre guz.

Anton gand keuz d'he densor a lavar eur beden ;
Al laer spontet gand eur spez 'rent he dra d'he berc'hen.

P'oc'h bet laeret, pedet han, hen a raio d'al laer
Dond d'en em anavezout 'vel ma reaz d'ar skolaer.

Eur bizou d'eur mignon d'han, enn eur stank a gouezaz,
Ha Frer Anton, en eur pesk, war he daol hen kasaz.

O klask eur pezh, eur barner, a furche enn pep korn ;
Zant Anton pedet gant-han lak he baper 'n he zorn !

Ia, nep enn devo kollet, ra bedo zant Anton ;
Hadkavet a rei ken prim ken en devo eston !

Faziet oc'h war ho hent ? Goulennet he ali ;
Hen ho lako da skei eeun ha da vont difazi !

Berrek oc'h, hag o klask goud penoz en em gemer ?
Hen a vezo evid oc'h ar gwella kuzulier ! -

Piou a hellfe disrevel brazder he garante
Evid ann dud ezomek a gorf hag a ene ?

Doze hepken hec'h anav ; eul lever ve re vian
Da niveri ann oll dud en deuz tennet a boan.

Dibab a ra 'vid ho skuill ouz ezom ar c'hreunen
War bark ann tiek kristen tomder pe ienien.

Pa hirvoud, enn dienez, ar paour kez reuzeudik,
Ar zant mad a bourve d'han, dre zorn ar pinvidik.
D'euz ar vosen, ar gurun, ann dilagn, ann tan gwall,
D'euz pep reuz ha pep darvoud he vignon a ziwall. —
Gwèach epad prezek emeaz, 'teue eur pilad dour ;
He zorn zavet war ar bobl a re d'ann oll kledour.
Gwèach e vije gand Satan he gador eil-pennet,
Mes nag hen na den er-bed gant-hi na oe glazet.
Paz oc'h enn risk d'ho puez, pedet han d'ho tiwall ;
Digouezoud 'rai d'ho harpa ha d'ho miroud d'euz gwall !
Gant hen pedi kalonek, nep a zo enn klenved,
Mar g'eo mad ze d'he ene, a gavo ar iec'hed.
Eur potrik, kouezet en tan, oe war var da vervel ;
He vamm, pa lamp d'hen zikour, hen kavgwerc'h ha zebe !
Eunn all dalc'het gand ar guent, seiz vloaz war he wele,
A bed zant Anton, ha raktal, e ma goest da vale. —
Plega a ra d'ann dever ann heurta zantimant :
D'eur vul e reaz daoulina dirak ar zakramant.
Mamm, pa vo ho krouadur kez penn kalet hag amzent,
Ho pet zonj piou da bedi d'hen lakaad enn he hent.

—o—

Eur gwal deodad 'zo gwasoc'h evid eunn taol kontel.
Gand ar manac'h na glevec'h nemet komzou zantel.
Doue en deuz diskouezet, dre eur burzud hep par,
Vertu eun den na gomzaz nemet evid he c'hloar.
Da bell goude he varo, pa zigorjont he ve,
He dêod oè kavet ken fresk 'vel ma oa 'n he vue.
Gras d'imp no zeufemp biken da ranna ger direiz
Gras na zilfe teodou fall ho bilim en hon c'hreiz.

—o—

Kaout madou n'êo netra anez doujans Doue :
Red êo d'imp, da genta oll, zavetad hon ene
Paz oc'h tentet gand an diaoul, mar fell d'ac'h bezan trec'h,
Pedet ar zant gallouduz 'zoug Jezuz war he vrec'h

Eur manac'h paour trubuillet gand ar zonjou lubrik,
A glaskaz nerz gant Anton, eneb d'ar spered lik.
Dijalet en em gavaz, gand gwiska he vantel ;
Hag a neuze, 'n he vue, e oe pur vel eunn el !

—o—

Mar c'heuz eunn den kar, ve losk war he rilijion,
Galloud a rai 'n em reizha, dre zikour zand Anton.

Er sperejou a laka ar sklerder da lufran :
Morzol ann heretiked vije graet anezhan

—o—

Ar manac'h madelezuz oa ker d'ar vugale :
'Dal ma luske d'ho c'huitaat, e krogent enn he zae !
Kalon eur bugel kristen a dom e kenver Jezuz,
Koulz ha d'euz nep a ro d'han ar Maestr karantezuz !
Zand Anton hen doug, dreist-oll, war zu ar re vihan,
'Vit ma viro iac'h ho c'horf, ho ene pur ha glan,

—o—

Zand oberour miraklou, roet d'in ma mennad !
Me iel da Iliz Purit 'vid ho trugaraad.

Eno e ma ho portred, eno ho relegou ;
Enn iliz se 'plij d'ac'h skuill ho kwella bennoziou.

Da zul ar C'hazimodo, ec'h enn di d'ho pardon,
Da c'honid hoc'h induljans, da heuill ho prozision,

Eur zoursen d'ac'h 'n euz strinket 'ntre ar C'hoad hag ar
War he dour freskann Iliz deuz skuillet he bennoz [Roz

Pam bezo evet deus-han ma c'halon vo zeder
D'euz zantelez ha iec'hed e tanvin ann dousder (1).

Hag araok kimiadi, dirak ho relegou,
E c'houlennin c'hoaz ar c'hraz d'ho kwelet enn envou.

P. P. Q.

Onésyme Le Boudec,

IMPRIMATUR : Person Peurit

Brioci, die 30^e januarii 1899.

M. LE PROVOST, vic. gén. Quintin

(1) Totius virtutis ac sanitatis dulcedine perfruantur. (*Prière du Rituel*).